


DISTRO EUR ZOUDARD

Da di e dud goude seitec vloa servich

(VAR DON INTAON ALL LOCHEN)



C'hoantat refac'h n'eur basseal,
 Ec'h antrefen en o logeamant,
 Gallout refec'h logea ragtal,
 Eur zoudard zo en poan en tourmant,
 Zo o tistrei en e gontre,
 Goude servicha pad seitec vloa,
 Goëlit va c'horf zo goloët,
 A vlessou er brezel diveza. (bis)

Allas den mad me a garge,
 Ec'h aljen soulagi o mizer,
 Sioas ni a zo dibourve,
 A va fried ne man ket er gher,
 Gouskoude pikit va c'halon,
 Ma vige bet va phried er gher,
 Pa nige clevet o reson,
 E nige soulajet o mizer. (bis)

Pell a c'hann e man o pried,
 A respont ar zoudard mal'hevrus,
 Ma vige bet en em rentet,
 Diuzon vige bet truezus,
 Gouscoude m'ho pige eur mab,
 Eveldon-me bars en nehamant,
 E vige c'h bet kontant marvad,
 D'en tenna a boan ag a dourmant. (bis)

Allas, azezit va den ker,
 Me meus ken aon deus ar goël dëodou,
 Va phried perruo er gher,
 O soulageo en ho souffrançou,
 Ya eveldoc'h me meus eur mab,
 Me gred e neus collet e vue,
 Me gred e maro er gombat,
 Pell deus eur famill ag a garie. (bis)

Oh, va mam vad ne gredit ket,
E vefe maro c'hoas o puguel,
Sec'hit o taërou me o ped,
O mab ne ket maro er brezel,
Goëlet a rit tout va blessou,
C'houi e ar vam e deus va ganet,
A va zad n'en d'he ket maro,
Lavarit hast e m'eus da glevet, (bis)

O va buguel karantezus,
Deus c'hoas eur vech entre va diou yrec'h,
Me e ar vam zo evurus,
Ag a zo breman rentet dinec'h,
Ya da dad a zo en bue
Prestig e neur gavo bars er gher,
Geagrin bras a neoa dide,
O songeal ebars en davizer. (bis)

Oh, va phried deus buan ta,
Or mab a zo n'eur gavet er gher,
Deus buan da boqat dean,
Rag breman a zo fin de vizer,
O Doue leun a vadeles,
C'hui a peud exoset va pheden,
N'heur renta din va buguel kes,
Gloar eno dec'h da vigen. (Amen). (bis)

FIN

(Propriété de l'auteur) ТАОС.

AR CHEVALIER ROLLAND D'HE BRIED ISABEL

(VAR UN TON ANVEET)

Red eo e lavare goëchall,
Rolland pried tener Isabel,
Red eo me renq partial,
Vit monet d'an Turqi d'ar brezel,
Goëla a res din-me breman,
A kaon a res din var da veno,
Eun all abers nemeur aman,
A deui da zec'ha pis da zaëlou. (bis)

Ne get possubl did e vanqfen,
En eur oëla eme Isabel,
Did e vezin da virviqen,
A pa vez maro bepred fidel,
Ma zeufen da ankonac'hat,
An ini a meus kement karet,
Ra zeui dirag va daoulagad,
En speç da rebech din va phec'het. (bis)

Mar demezan var va debes,
Er banquet em c'hichen azeet,
Deut da gass ac'hanon d'ar be,
A lavaret vo me o pried,
Rolland a zo maro sioas,
Izabel e deus caon ag anqen,
N'he ket echuet mad ar bloas,
Ma teuas eur marqis d'he goulou. (bis)

E renq e c'henet e arc'hant,
A zallas calon an intanves,
Rei a rës e c'honsantamant,
Ag assinet e oë an debes,
Ar gerent oll nem assamklet,
Ar banquet a gomansas souden,
Ne oant get c'hoas p'eur azeet,
Eun ofiçer oa en o c'hichen. (bis)

Spontus bras a rë e velet,
Rag er guis-se guisket en ouarn,
Evel-se tout oa goloët,
Kerkouls e vizach vel e zaouarn,
Ne gredient ket sellet e faç,
Couscoude o doa c'hoant de velet,
Ag en ep finval d'eus e blaç,
Deus Isabel a zelle parfet. (*bis*)

Ar mab neve ken zouezet,
A n'eus lavaret en eur grena,
Tennit o casq ya me o ped,
Ag azeet ganemp da leina.
E gasq neuze pa n'eus tennet,
O bebeus orrol meurbet c'hoëro,
Srijal a rë tud an eured,
O velet bizach un den maro. (*bis*)

En e za plom ar geanteris,
A zelle parfet eus lzabel,
Sell emezan sell ouzin pis,
Me e Rolland lazet er brezel,
Din-me goëchal e poa prometet,
A pa zigoëche ganen mervel,
Biqen pried pige kemeret,
A din e viges chomet fidel. (*bis*)

Asten a ra e zorn pouner,
Caër e deus crial a deplori,
Gant an douar int bet lonqet,
A c'hoas e c'hleffjoc'h oc'h irvoudi,
Ar marquis zo chomet mantret,
Ag a neus laret ken partia,
Me a zo eun den goëll dapet,
Ag a m'eus eur sort deus an trista. (*bis*)

Isabel a deu di bep bloa,
Gouisqet er gis mont da eureugi,
O crial ato oasoc'h oas,
Ar speç ne ziscrog morse outi,
Abaoë den gant aon mervel,
Neus gret demeuranç er c'hastel. (*bis*)

GUERZ TRUEZUS

VAR SUJET

EUR VREG DEVET EN BEO GANT E BUGALE

Daou guillotinet

D'ar bevar varn'hugent a viz genveur 1887

(VAR UN TON MEURBET TRIST)



Peur eta va Doue, e c'hallin reçita,
Crimou qen effroyabl, vel ma eru breman,
Va c'halon deu da sclassi, va dorn deu da grenn,
O tont da siscleria, eur c'helou an trista.

Kals d'eus a gueloyou, a veler rapportet,
Var sujet malheuriou, a vez en eur gavet,
Ar c'hossa den zo biscoas, ganet gant tad na mam,
N'ho deus clevet james, un dra zo ken esclam,

Mont a ran da gommanç, discleria en antier,
Mar permet va Doue, den laqat var baper,
Ar pes zo eruet, gant eur vreg ançien,
Gant e bugale brob, devet kig ag esquern.

En eur gherig vian, Romorantin anvet,
Ebars en kichen Bloi, e ar c'hrim cometet,
Pevar den mal'hevrus, zo bet en em glevet,
Da zevi o mam baour, creis an tan en oalet.

Ar plac'h man oa intanves, eur pennad mad a oa,
A oa en toès an dud, o c'honit o bara,
Tri buguel deoa savet, daou ane tud yaouanc,
Ar verc'h oa demeet, da gresqi e zourmant.

O vea deut re gos, oa ken vit labourat,
Zongeas kemer repos, en ti e merc'h ena,
O vea deoa ramasset eur yalc'hadig arc'hant,
Oa bet diguemeret, gante sur goëll gontant.

Mes prestig da c'houde, oa ar yalc'h ramasset,
O mam deustu gante, a vije goëll dretet,
Rag an daou vab pa glefjont, oa o mam ti o c'hoar,
A deuas d'he goëlet o daou bars en kounnar.

Arça eta va c'hoar, te a peus kemeret,
Ar garg demeus or mam rag did e deus roët,
Ann ac'hant d'eus goneet, en tro pad e bue,
A n'hi daou vab dezi, n'he douchfomp sort onte.

Ar verc'h fuloret bras, a lavaras deze,
N'ho doa goëlet goënnec, aboë ma oa gante,
Ag e oa var o c'horf, o veva pell a zo,
Ar boëd-ar-gonner goz, me garfe ve maro.

Deus adaleg neuze, e vige goëll dretet,
Tolet a distolet deoa ket anter voëd,
Alies vige staguet bars en craou all loënet,
Anvet sorçeres kos, gante, dre ar c'hontre.

Mes o vea deud scuis, tont d'he fersecuti,
Na ouient ket penos, n'em dizober onti,
Ar verc'h ag ar mab-kaër e bedaz o breudeur,
Da zont di da goania, da gonclui ar mal'heur.

En nos-se e oa fest, d'eus an ini goëlla,
Mes o mam n'he goële, ne deoa bet netra,
Mes en em brepari, da zoufr eur maro cri,
Abers e bugale, dinatur ag impi.

N'em glevet a rejont, pa vige fin da goan,
Bars en creis an oaled, ober un tantad tan,
Ag ell laqat ebars, pa vige bet krog mad,
A neuze gant petrol, arozi e dillad.

Ar plac'h-man n'he goële, ne zonge droug ebet,
Mes e mab-kaër enni, ragtal a n'eus croguet,
A laqet anezi, da azea en tan,
Ma commansas crial, forc e bue varn'han.

Essa a rës dont kuit, mes an den milliguet,
Neuze bars en e bréc'h, a neveys bet croguet,
Vid e derc'hel en tan, pad vige o tevi,
An tri all a gane, ag a rë goab onti.

Me o ped va breudeur, ive va c'hoarezet,
D'ober reflexion, bars er pez a glevet,
An den cria zo bet, biscoas var an douar,
A ranno e galon, o c'levet an histoar.

A c'hoas mignonet ker, celaouit oll breman,
Ar verc'h doa eur buguel, oaget eus a zeis vloa,
Ma oa gret dei cana, litanion ar Verc'hes,
Pad ma teve e mam gos, blamour oa sorçeres.

Mes allas benn neubent, an tan zo deut abenn,
D'he devori en beo, allas, kig ag eskern,
Met e fenn zo chomet, ep bea luduet,
Pes a zo bet penn-cos, m'he ar c'hrim anveet.

Ar mab-kaër zo chomet, da ober gardien,
Var an tan en oaled, evit dioall ar penn,
An tri all zo bet eet, da laret d'ar mairi,
Penos oa eruet ar mal'heur oa qen cri.

Ar justic zo bet et da velet an affer,
Ag en eur antreal, o d'eus santet ar flër,
Goëlet ar penn eno, ragtal deus comprenet,
Penos e oa eur c'hrim, a oa bet commetet.

Ar bobl-oll a oële, ar justic a grene,
Goëlet eur sort torfet, eruët er c'hontre,
Ragtal int cunduet, a kasset d'ar prison,
Vit gortos o setañ, o c'hondaonation.

En mis du divea c'huec'h, a pevar ughent,
Dan eillvet varn'hughent, evit rei da entent,
Int bet apparisset, ebars er C'hourd'assis,
Da renta pis o c'hont, tre daouarn ar justic.

372

Ebars er gher a Bloi, int bet apparisset,
En lec'h ma oa nombr bras, eus a assistantet,
Goëlet pevar griminel, o tont d'apparissa,
An oll grie vengañ, ar maro d'ar reman.

O merc'h vian seis vloa, e ze bet ar goassa,
Rag ganti e clevet, ar virionez sclerra,
A goude m'he bet clevet, eno tout an testou,
Ar verc'h ag ar mab-kaër, o deus bet ar maro.

Ar mab cossa n'eus bet, beteg fin e vue,
Ag ar mab yaouanqa, ughent vloa n'eus ive,
Evit o recompans, d'eus eun torfet ker bras,
Meritout rent bea, diframet var ar plaç.

D'ar bevar varn'ughent, demeus a vis genveur,
Var blaçen Romorantin, d'an tol d'eus a seis heur,
E bet apparisset, an daou bried fidel,
Dirag eur foul a dud, renkont dont da vervel.

Cetu ta kristenien, un exempl an trista,
Gle lagat ac'hanoc'h, da zont oll da grena,
A da garout o tud, en guir dougeañ Doue,
Vit galout er meuli, ed an eternite.

An ini a neus gret, a reñt a neve,
Var sujet eur famill tud fall a milliguet,
Yan an Таос e e ano, en lec'h ma renq sina,
A deu d'ho saludi, n'eur dont da finissa.

FIN

(Propriété de l'auteur)

Таос.